

# D I S P U T

ENTRE

## E U R C' H E R E

### HAC EUR BOTOER COAT



Voar un ton neve

Mar gallan gout ar feçon, e teuin da rima  
Eun disput a neve flam, d'en em divertissa,  
Savet entre ar Chere hac ar Botoer coat :  
Pa vent crog en eur boutail int daou pot dilicat.

O daou o deus prometet e mijie digante,  
Goude formi eun disput excellant entrese :  
Eun doucen vio frivet hac eun tam bara guen,  
Hac eur bane da eva er fin ar ganaouen.

Mar be glebiet an anchen ar bombard a zonô,  
A silaou gant parfete eun darn a resono,  
Vit ho lacat da zisput an eil oc'h e guile  
Ha non pas rima netra nemet ar virione.

Er goan ec'h intentan, eme ar Botoer coat,  
E me a zeu da viskan treid an dud dilicat,  
Ha te Kereer infam gant da vouteier ler,  
A zigaç ar c'hlenvezo hac eun nombr a viser.

Eun tam eo istimet huelloc'h ma etat  
Evit n'en deo da hini, pot ar bouteier coat ;  
Me rankje beajerien bale gant sorguello  
E vent eun anter hirroc'h, oc'h ober compagnio.

Evit prepari 'n douar da lacat an trevat  
Eo un dra necesser cavel eur boto coat :  
Ne veler d'en o palat er park gant boto ler  
Ha c'hoas e fell dit laret ne n'ont quet necesser.

Gout a ran eo ar boto coat a gonserv ar yec'het  
Hac a brepar an douar evit lacat an ed,  
Evel ma c'her da redec er par gant-o 'veicho  
E scanvoc'h eur boto ler evit eur sorguello.

Pa deui an erc'h, ar scorn, hac ar goan kalet,  
E ranko ar Chereou paça e vinaouet,  
Ha me doucho an arc'han partout er marc'hajo  
Ha te zello ouzin, ha digor da c'heno.

Pa erruo mis meurs, hac an neve amzer,  
Da viska 'n habijo brao hac ar boteier ler.  
Neuze na vo estimet netra eur boto coat,  
Eur boto ler da vale a zo trao dilicat,

Alies e rankes mont da dy ar c'hivijer,  
Choas ma ne pe nemet tri skoët pe eun tri skoët anter,  
Ha me laca assambles betec c'huec'h ugant skoët  
Da brena ar c'hood boto evit ar baysantet.

Goel a ze dit, ma mignon, pa deus eur bern arc'hant  
An neb o deus neubeutoc'h a vev honestamant,  
Me a deb kig ha souben ha ma yod da greiz-de :  
Oordinal ec'h intentan on bevet couls a te.

Poent eo din finissa rac an nos dosta,  
Hac an hostis a jeno pa na evomp netra,  
Haca roï din o chonje. Coader ha Kerer  
Da bartial eus he dy ha mont da gaet ar guer.

Ebars en hostaleri 've aliez rezonio,  
Disput entre 'r vignonet ha chass-bleo avechou ;  
Ar c'hoste cre a c'hone ebars en peb affer,  
Mar keres ni a velo, eme ar Chereer,

Goud'eis cov e corjont'vel daou ghy animet  
Hastagan d'en em gannan evel tud malisset,  
Ken ma rankas an hostis kemer e vas ribot,  
Ha skei var zin diskregui en feçon ma oant krog.

Goulenomp eur chopinat d'en em dispartia ;  
An hostis hon servicho mar deuomp d'bea,  
Hac evomp peb a vanach'er er fin ar ganouen ;  
An oll a rank caout boto pe vale diarc'h'en.

An hini en eus rimet an disput dilicat  
Savet etre eur Chere hac eur Botoer coat,  
En eus gret meur a hini, e hano Yan AR GUEN,  
Hac a veler ordinal en fin ar ganouen.